

Feiz-ha-Breiz



E O S T 1 9 2 7

■ ■ ■ ■ ■ ■ ■ ■ ■ ■

D'an 12, 13, 14 ha 15 a viz Gwengolo eman ar Bleun-Brag
e Montroulez ; eus a bevar c'horn ar Vro e tiredo
Bretoned d'ar Goueliou kaer-ze.

FEIZ HA BREIZ



- EO
- KOS
- KAERA
- HA MARC'HADMATA
- KANNAD MIZIEK SKEUDENNET
- A C'HELL KAOUT
- AR VRETONED



FEIZ HA BREIZ a gav derziñer e kement ti kristen e vez kement ennan brezoneg.

Er Bloaz 1927

FEIZ HA BREIZ a vezo kalz kastroc'h c'hoaz; kreskiñ a raso eus an hanter; e vev a vezo an hini a vo roet d'ezan pa vo kronet, er bloaz 1885, hag a viras epad 19 vloaz.

Digor e vezo n'eo ket hepken D'AR PEVAR BREUR, da lavaret eo da vrezeg Leon, da h'ol Treged, da hini Kerne ha da hini Gwened, met ivez da hini Bretoned Breiz-Uhel o deus rak-het deski brezoneg, nann, stouaz, war barlen o mammou, met el lavrenn; daoust da-ze, gwelet a reoc'h, e ouzont en em denna gantan brao bras, hag hep dale Breiziz a ouzo en em glevet eus an eil penn d'egile da Vreiz ha n'o devozo ken etrezo nemed eus feiz, eur yez, eur galon.

FEIZ HA BREIZ a raso TRO VREIZ, embann a raso, gant taolennou dispas, studiadennoù war hon Iizou-meur, hor chapelou, hor c'halsvarion, hon tenzorion a hep stumm hag a hep danvez; peadra a vezo gantan da ober eal levez evel ma n'eus ket bet moulet c'hoaz hini ebet ker kaer e brezoneg.

N'eo ket 40 skrivagner eo a skrive ennan er bloaz 1927, met 50, da nebeuta.

Daoust da-ze e vezo ker marehad mat ha biskoaz.

Da gemeret en hor moulenz pe en hon tiez-gwerz, diouz an niverenn, ne gonto nemet 4 real hepken.

Da gemeret, diouz ar bloaz, pa ne gemeret nemed eun niverenn hepken, eo 12 lur ha 10 lur hepken, dre bez, pa gemeret da nebeuta 5 niverenn.

KOUMANANTIT DA FEIZ HA BREIZ
 LIZIO KENTOC'H EGET WARC'HOAZ

O kas ar priz anezan hag hoc'h adres, dre ar post, d'an A. Georgelin, 4, rue du Château, Brest. C/C 44.40, Rennes.

Kennav, lennerien vat ha krenvroz ker, ha bennoz Doue d'oc'h.

Plougern, d'an 8 a viz Kerzu 1926.

J. V. PERROT,
Rener e Feiz ha Breiz.

An Den Eurus GLAODA LAPORTE

huhar skrievet e galleg gant an A. Saluden, beleg-kelenner e skoleh Itron Varia Wir Zkour, e Brest.

— kurmet gant Akademi Bro-C'hall.

— ha troet e brezoneg gant an A. Chapalain, kure Sant-Martin, Brest.

A unanou, 2 skod 6 fr. 25
 Dre zek, 2 skod n'annet pemp 5 75
 Dre ugout, 2 real warn'argent 5 50

Nemed ar re a brezo al leor hag o do graet o goulenn arag ar 15 a viz eost 1927, a vo rabatet dek gwynenn d'ezo war bep hini.

Beteg ar 15 a viz eost, kas ar goulennou pe da voutez ar *Chourier*, pe d'an A. Chapalain, 5, place Verdun, e Brest. — Goudeze e vo kavet al leor en darn vuia eus an *Her-Izorian*.

An Aoutrou'n Eskop a Gemper en deus bet ar vadelez da skriva en Izer a vo gallet da lenn er penn kenta eus al leor. Lavaret a ra e plij d'ezan gwelet trei e brezoneg leor an A. Saluden.

« Applaudis à votre projet de traduire en breton la vie du Bienheureux Laporte. »

« Les lecteurs français ont bien accueilli le livre si intéressant de M. Saluden. Il ne plaira pas moins aux habitants de nos campagnes, qui admireront dans l'ouvrage tant après de la ville de Brest, le modèle des prêtres et fidèles auxquels leurs aïeux ont dû la conservation de leur foi et de leur vertus familiales. »

Hag an A. Henry, ehanon a emor, preson Sant-Martin Brest, goude beza leonet al leor a ra anezan ar voutenn-mañ:

« Ho leor a zo skrivet en eur brezoneg yañh. Henevel euz ar pead, marelet d'an nevez amzer gant bleunioù a bep-hon etouez ar geol glaz, ho brezoneg a zo marelet eus a gement a ra plijadur d'al lenner: leor ha lous eo pa gouez euz dander ar merer, n'annet pa ziskouez e nerz kalon d'rag ar fallagriez, rust ha kalet pa sko war gredier e vourrevien, klemmus pa gont e boanion hag e varo; sklaer eo evel ar wirionez a laka alou a wal; dougen a ra d'ar gantelezh, ne abao du gellan penn da lenn. »

Al leor brezonek en do gent al leor gallek, nemed en do eur hajenn bennak muioc'h. Tost da 220 pajenn a vo ennan.

An A. Saluden, ouzpenn m'en deus roet otre da drei e leor, en deus bet ar vadelez da rei an taolennou zo ennan, evel al leor brezonek.

A hend-all, gouenn al leor a zo graet en emm doare da dijont d'al lagad a haro warnan.

Butez an Den Eurus Glaoda Laporte a vo eun tammig leor komt, a hollor da rei evel priz d'ar sugale, hag a biljo muioc'h c'hoaz d'ar re vras, da vebana m'hen lennot penn da benn, rag el lodenn ziveza ennan ar gwelezh magadurezh evel ar leor.

Al leor a vo kaset da breza e ti E. S. I. A, ru ar Chastell, goude Hanter Eost.

J.-L. CHAPALAIN.

BRETONED, arabad eo d'eoc'h hen ankounac'hât

D'an 12, 13, 14 ha 15 a viz Gwengolo a zeu eman goueliou bras ar

Bleun=Brug e Montroulez

Breiz-Izel ha Breiz-Uhel
Breiz-Veur hag Iwerzton
a vo eno.

An holl boblou a zo breset o frankizioù, frankizioù o feiz ha frankizioù o gouenn, a zigaso kannaded d'ar goueliou-ze, evid en em glevet, en em skora, ha klask an tud da lakat o amzer da zont da veza laouennoc'h eged o amzer vremen.

Montroulez a vo en deizioù-ze
eur mor a gan,
a c'hened hag a levenez.

FEIZ HA BREIZ

KELAOUENN VIZIEK GANT SKEUDENNOU
Renet gant Y.-V. PERROT

TAOLENN AR MIZ

SULIOU HA GOUELIOU AR MIZ

Bleun-Brug Montroulez, p. 153. — Montroulez, G. P., p. 154. — An Ao. doktor Cornic, F. AN HADER, p. 157. — An Aval ruz, J. BULEON, p. 158. — Chapel Itron Varia Kermitron, G. P., p. 159. — Ar Gontiriasion e enez Sizun, J. U., p. 162. — Sivi Plougastell, VISANT INZAN, p. 163. — An dilhad kaer, E. AN MOAR, p. 166. — Mikael an Nobletz, J. U., p. 168. — Dismantr Jerusalem D. N. D., p. 170. — Pajennad Breuriez-Veur ar brezonneg, F. Vallée, p. 172.

7 a viz eost. — IXth sul goude ar Pantekost. Oferenn ha gousperou ar zul-ze.
14 a viz eost. — Xth sul goude ar Pantekost. Oferenn ar zul-ze; gousperou kenta gouel I. V. Hanter Eost.
15 a viz eost. — Itron Varia Hanter Eost. Gouel berz.
21 a viz eost. — XIth sul goude ar Pantekost. Oferenn ha gousperou ar zul-ze.
28 a viz eost. — XIIth sul goude ar Pantekost. Oferenn ha gousperou ar zul-ze.

BLEUN-BRUG MONTRouLEZ

XVIIth Gouel

12, 13, 14 ha 15 a viz Gwengolo

— *D'al lan 12*, da 9 eur, tro vale, dre girri-dre-dan, da velet Kastell-Paol, Roskoif, Kerourer, Kerenguy, Ker-gouarnadech, Keryann, Berven ha Lambader.

Da 20 eur 30. — Bodadeg e tiker Montroulez, Prezegennou ha kaniri.

— *D'ar meuz 13*, eus 9 eur da 11 eur, — tro ker da velet ar pezh a giera a zo enni.

Da 14 eur. — Studidenn war lezenn Walter diwar-benn ar frankizioù a zo dleet d'omp da gaout ha war lezenn Seltz diwar-benn an deskadurez dionyezek gant an A. Leon Toulemon, sekretour *Bleun-Brug* Leon.

Da 16 eur hanter. — Ar re a gar a 'z aia da ober eun dro da Zant Thegonneg ha da Wimilian.

Da 20 eur 30, e patronach Sant Vaze, *Saik ar paotr fin* an A. Carne a ve c'hoariet gant Paotred Lok Gwengolo.

Ankele'her Potr Juluen a vo c'hoariet gant paotred Sant Thegonneg.

D'ar merc'her 14, — da 9 eur, — Pennas ober Bretoned vat eus hor bugale.

1) en hon tiegeziou, gant an A. Nestour, Renet *Bleun-Brug* Gwened.

2) en hor skolioù, gant ar chatoni Grill, Enseller skolioù kristen eskopti Kemper ha Leon.

3) e bodadegoù hor Yaouankiz, gant an A. Urvoig, kure, Peres-Guinec.

Da 14 eur.

4) en o micherioù gant an A. Quilgars, eus a Roazon.

5) Pennas brezonekita da vat hor skolioù gant an A. Madec.

Da 16 eur 30. — Ar re a gar a 'z aia da ober eun dro da Brinell ha da Zant Yann ar Biz.

Da 20 eur 30. — E patronach Sant Martin:

Dre ar bedenn gant strollad Douarnenez.

Trubuilhon ar Sêz paotr gouarnik, gant Loeiz ar Floch, a vo c'hoariet gant Paotred ar Arbor.

Eun eured e Bro-Wened a vo kanet gant Kanerien Sant Yohann Brevelay ha Pleuvigner.

Dansou Breiz gant Merc'her Pont-Kroaz ha Douarnenez.

D'ar gouel 15. — Da 8 eur, Oferenn e Sant Vaze. Prezegenn gant an A. Pichon, person Sant Vaze.

Da 9 eur. — E patronach Sant Martin kenstrivadegoù war al lenn, ar pezeg hag ar c'han.

Da 13 eur 30. — *Bugale Breiz* a raio tro ker, e kirri dre dan, bliennet ha fêchet kaer, a-raok pignat da Gouarnede.

Da 14 eur 30. — Paotred Mikael an Nobletz a rasklerio « *Nevez Anzer* » B. Hemon, hag « ar Blogorn ».

Kaniri gant an holl strolladou kanerien, diredet d'ar Gouel. Dansou kaera Breiz-Izel.

Da 16 eur 30. — Le da jom atao Bretoned vat, dre holl bepred, betek mervel.

TAOLIT EVEZ. — An holl studidegoù a vezo graet e patronach Sant Martin. An holl a c'hellio a heulia heb ezomm da ben.

Na brenit ket arreburi araok beza bizitet ar

Stal-labour vras war an Arreburi

giz-Vreiz, giz-vreman, giz Lociz XVI ha giz koz

Ti Loeiz QUEMENEUR

Kizeller-koad Breizad
Savet e 1905

Eun dibab bras a gamchou-gweleou, — Saliou dibri a bep doare.

Arreburi evid a dud a ziwar ar maez.

Hor stalioù gwerza ha diskouez a zo 215 ru Jean Jaurès (diskenn ar c'har-tram e an Rat gousteux - Quatre-Moulin's) e KERBER (Sant-Per-Kilbignon) tost da Vrest.

Téléph. 8-03 Brest.

Tud an ti a oar brezonneg.

Red-mat eo d'eoec'h dont da velet!

Kaset e vezo ho prenadennoù d'eoec'h dre tumporell-dre-dan.

Hangars agricoles métalliques

Charpentes métalliques Serrurerie d'Art
Ponts en fer Toutes pièces forgées
Tour et estampées.

J. BERTHOMIER

Constructeur

90, rue Jean-Jaurès, BREST Tél. 2-75

Fermatures de magasins Silos métalliques
Persiennes en fer à fourrages « Gautier »
Grilles articulées
Monte-charges et monte-plats
Représentant des Ateliers et Fonderies
Gautier fils, Paris.

Tous projets et devis gratuits sur demande.

Ti kos L'OLLIEROU - L'Hostis et Jorde, deul war e lec'h

18, 27, Straed Leuz-Pastour - BREST - R. C. 146

P4 ho peto eun dra dennek da brema, dalchit sonjez eo en hon ti e kavoc'h st'ar muis da joaz hag an trezon serva e munchoerou ha ta-vandronn Brodet. Sêz, maez ha davez a bep doare!

Dioch doare ar varzhadurez an ti-man a wez gwelloc'h-marc'had eget n'eoet betek holl. Eus eskopti a eget trall dre gant a ves roet e marc'hadurez ha dek dre gant d'ar familhoù obero.

GARAGE CENTRAL

DU RUSQUEC et C^{ie}

17, Straed Jean Jaurès, BREST — Teleph. 0-51

Gouarnerezh ar merkou:

DONNET-ZEDEL - DELAGE
CHENARD-WALCKER - ROCHET-SCHNEIDER

11 CV ha 7 CV DONNET-ZEDEL
a c'heller gwelst ha prena raklat er stal

Stock Michelin

Labouradeg stummet eus ar gwella evid noza mat ha buan an

holl girri dre dan

Ar c'hrezi chomet a-raok war an hent a vez distac'het ganeomp
war ar sul hag ar gouestloù

Stal-labour karonserez. Dibrezere ha liverez

R. C. Brest 2523 Téléphone 25

Ti Frédéric LAURENT

23, 25, 27, Straed an Tour d'Auvergne - LANDERNE

An itron intanvez LAURENT war e lec'h

Dreist evid ar goustadon skiant war rojou kelic'hlet-
gom. Road-Caris ha treferezed, kirri-saoz, gardens.

Rojou kelic'hlet-kom a bep seurt. Ar Rojou kelic'hlet-kouarn
a vez lakat ganeomp da rojou kelic'hlet-gom.

Quincaillerie HAUTIN

(Maison fondée en 1850)

Louis BERTHELOT

SUCCESSEUR

102, rue Jean Jaurès et rue Saint-Martin

Téléphone 1-35 BREST (FINISTÈRE) R. C. Brest 9548

Grand choix d'appareils de Chauffage

Articles de Ménage - Eclairage - Articles de Bâtiment

Toiles cirées et Nappes

MONTROULEZ

I
 Montroulez a zo e goueled an aber a zisparti eskopti Leon diouz eskopti Treger (1); ar mor, pa vez uhel, a zav betek he ziez kenta ha diou ster, ar Jarlod hag ar C'hleud a deu enni da doueza o dourion. E penn ar c'hrec'h a zo azioch o c'hember e oa, e bloavezion kenta an amzer gristen, eur c'hastell savet gant soudarded Rom hag eun tik bennak savet, unan hag a-hon, hed-ahed an diou ster. Drennaluz, diskib Joseph Arimathi, eme ar re goz, a brezegas eno ar feiz hag a zavas, en eur c'hroz-hent, eur groaz hag e veze dalc'het goulu beo dirazi, betek amzer an Dispac'h.

Wardio an XIII^{em} kantved, Duked Breiz a gemeras perz er ger-ze perc'hennet betek neuze gant beskonted Leon hag a greskas he c'hastell.

Daoust ma voe laeret altes epad ar brezelion, Montroulez a deus da veza pinvidik mor ha ne oa ker ebet e Breiz da c'houzout kas ar c'hemwerz, en dro, evelli.

Er bloaz 1294, an Duk Yann ar Rouz a zavas eno, e traon e gastell, iliz kaer Itron Varia ar Vir a voe dismantr'et gant Dispac'herien 1793, Tour an Iliz-se, kaer evel hini Kreisker, a gouezas en e bonn, er bloaz 1806, en eur ziskar meur a di hag en eur laza eun dek den bennak.

Er XV^{em} kantved, mortoloded Montroulez, kenwerzieren ha rederien vor, evel gwazed Sant-Malo, a lake ar Zaozon d'o douja. Unan anezo, Yann Gostanlem, a lakeas ober eun toullad listri da stourm ouz listri

Bro-Zaoz hag a yeas ganto da lakat an tan-gwall e ker Bristol. Goudeze ec'h en em dennas er Portugal hag e teuas da veza Mestr-amiral ar vro-ze. E ni Nikolas Gostanlem a lakeas ober e Montroulez ar c'henta lestr tri-hont a zo bet n'eo ket hepken e Breiz met zoken e Frans; hanvel e voe da genta « *La Mâre-à-Rochelle* »; Anna Vreiz hen hanvas goudeze « *La Cordelière* » al lestr-ze a voe gouelelet dirak Lok-Maze, er bloaz 1512, gant e gabiten Herve Borzmo-guer hag an 1200 martolod a oa warnan endra ma stourme ouz ar Zaozon.

Hi an duhez Anna

(1) Saint-Martin a oa e eskopti Leon; Saint-Vaze ha Sant-Melis e eskopti Treger.

Anna Vreiz a deus da Vontroulez, er bloaz 1506; kinniget e voe d'ez eun herming zony, eur c'helic'had perlez en dro d'he gouzoug; al loenig gwenn a lammas diwar brec'h ar rounez war he larenn, ar peza reas aoun d'ez eun tamm, met an Aotrou Rohan he dispontas dillo: « N'eo ket da d'eoec'h kaout aoun,



Ar Ra Vras

Itron, p'eo gwir enna hoc'h armou etre ho taouarn! »
 Dem-goude, d'an 2 a vezeven 1522, eun novez ma n'oa ket diouallet mat a-walc'h Montroulez, ar Zaozon a en em zilas e ker, he lareas hag a zavas he ziez ar kaer; met elreiz anezo, 700 bennak, leun o c'hof gant ar gwinn o devoa evet e stalioù ar varc'hadourien, a en em roas da gousket, dindan gwaz ar Stivel, hag a voe lazet eno gant noblans Breiz diredet, dindan urziou

Aotrou Laval, dal m'o devoa klevet ar c'helou edo an enebour er vro. Adalek neuze Montroulez a gemeras, evit he ger, ar gomz-man: *S'ils te mordent, mords-les!* Ahaoc, fenneleun ar Stivel a vez hanvet Feunteun ar Zaozon.

Ker Montroulez, dre ma n'he devoa ket neuze a dailhou da bae, a c'hellas en em zevel dillo; evit miret ne ziroje ar Zaozon d'he laerez a-nevez e savas, er bloaz 1542, kastell brudet an Taro, el lec'h ma lalc'has soudarded, war he c'hont, betek an XVII^{em} kantved. Kalz he devoa da c'houzav ivez epad brezelion ar Re Unanet; al laeron-vor a vire outi da ober he c'hemwerz; ar zoudarded a laere an dud diwar ar mezh hag arme ar roue a lake peziou kanol war dourion ker, da denna war vogerion ar C'hastell el lec'h



Iliz Sant-Vaze

m'edo ar gouarnner Rosampoul hag e Re Unanet, a betek en eur rei d'an 21 a viz gwengolo 1594, goude beza bet kalc'h'et gant o enebourien epad 26 dervez.

Goude an amzer gasas-ze, Montroulez a en dias dias adarre da redet ar mor. Douar kalz Louis XIV a lammas digant an holl frankizou, koulz lavaret, he devoa bet betek neuze; daoust da-ze e teuas a-benn da greski he danvez ha da wellat he c'hemwerz. A hent all nevezent ebet ken, nemed e saver eur manni nevez bennak, hag e raer eun digemer laouen da unan pe unan eus a bennadureziou ar vro.

Epad an Dispac'h e voe serret an ilizoù hag ar manatioù; ar veleien ha n'o devoa ket touet a voe stlapet er prizon, met, a drugarez Doue, ne voe lazet den ebet.

Diskaret he c'hemwerz, dre ma n'he devoa ket ker a dud pinvidik bras, Montroulez, hanter gousket, a



Banell ar brenn

zihunas, en eun taol krenn, wardio ar bloaz 1860, o klevet an trouz a raie al labourerien a oa denet da ober pont bras an hent-houarn a dille he zrouz. An hent-houarn bras-ze hag an hent-houarn bihan all a zo bet graet ahaoc o deus laket Montroulez da veza magajenn vras ar vro tro-dro.

Gwasa peza a zo he forz, daoust pegement a vizoù a zo bet gantan, n'eo ket gwall zartempredet; met ker, koulskoude, he deus doare da veza hec'houezek ha pinvidik. Montroulez a zo tud laouen, hegarat, speirek ha treset ouz kement tra a c'hell digas gwel-laenn er vro hag a-wechoù end-eun, an youl-ze o deus da vont war raok o laka d'en em dret ouz traou hag a ra mizioch a zroug eged a vad d'ezo. Beteg ar bloaz 1870, e veze c'hoariet, e Montroulez, meur a wech er zizun, peziou brezonek savet gant Jobig ar C'hoat hag e genivre August ar C'hoat, eus a Lanhuon. Ar peziou-ze, traou treset altes diwar ar galleg, ha skrivet « e brezoneg ker paour ma oa eur vez e velet » a veze kalz ouz o selaou; gwir eo n'oa nemet daou wenneg m'nt da zellet.

E Montroulez ivez eo ec'h emannas Bernez al Leou, er bloaz 1557, pezh-c'hoar Santez Barba « *histoire clouar Santez Barba* » ha n'eus chomet anezan betek hen nemed eul levr hag a zo miret e British Museum London.

II

Pa ziskenner e Montroulez dre hent-houarn Pariz, e weier ker, diwar ar pont bras, harpet ouz teir dorgenn, he zried e dour an diou ster a goll eno o dour er

mor, gant he leuriou, an dud o vont hag o tont dreiz-
to ha n'int ket brasse'ch eget merien da welet, gant
he ilizon ha n'eo ket ken uhel hag o zourioù ha gwa-
regeier ar pont a zo savet en o c'hichen, gant he ziez
koz hag he lhorzoù leun a gombouj a-ziribiga evel
liorzoù Babyon gwechall ma c'hellet, eus al liorz,
teurel eur galenn e pod ar zoubenn, dre ar sininal,
heb ezomm da ziskenn betek ar gegin. Pa zeller, e tu
an hanter-noz, e weler ar vrec'h vor, listri enni oc'h
chana ha pelloc'h, gwez bras a ro disheol ha freska-
durez d'ar manerioù a zo kuzet en o zouez. Pelloc'h,
e weler douarou uhel, a ya d'en em goll, evel koum-
mou ar mor, e kreiz ar vogidell.

Pa ziskenner eus ar gar e kaver, a-zehou, plas-ker
Sant-Martin, gant
he iliz adsavet eun
tammig a-raok an
Dispac'h, gant ar
person Expilly, a
denas da veza gou-
deze eskob touer ar
« Finistère » hag a
voe dibennet e Brest
d'an 22 a viz mae
1794. Ar vali greiz
a zo ledan hag uhel;
an aoter vras a zo
eun nel a bep tu d'e-
zi, e marb Kattar,
bet laeret gant eur
montrouleuz diwar
eur lestr eus an Ita-
li a oa o vont d'o
c'has d'ar Spagn;
gwer a liou nevez
a zo war ar prester-
ha taolennou graet
gant Puyo, eur
montrouleuz, a weler
war ar moer-
riou.

Tri hent a zo
ac'hano da ziskenn e kêr: ar ru verr, hent
an doreziou; ar ru Vourtel, gant he ziez koz hag
a vir en o c'hoazi merkoù pivañger o mistri kenta;
diskenn e c'heller ivez, e kêr, dre vanell ar Roc'h
Koroller, en tu all da bont an hent-houarn.

War blasenn Thiers emañ an ti-kêr, bet adsavet
breman ez eus pevar ugent vloaz. Pont an hent-houarn
a zo bet graet etre ar bloaz 1861 ha 1864; koustet en
deus 3 milion.

En tu dehou da bont an hent-houarn emañ iliz Sant
Melani, eskob Roazon. An iliz-se a zo bet staget d'he
sevel er bloaz 1489 evel m'her gweler merket war
eur skritell douget gant daou nel a-zioch an nor
gostez.

En iliz, ar pezh a gaera a zo da welet eo koatich
kizellet solier an ogrou, taolennou ha skeudennou
koz, en o zouez hini sant Everzin a vez pedet ouz
ar boan-benn.


War gae Leon e kaver an ti e raer emañ ar bu-
tin; a-raok ar brezel merched ar, butun a zouge
holl al lost-plik; breman, n'eus nemed eur vaouez
koz hennak hag a gendalc'he da zougen kouef an
amzer gwechall. Harp e ti ar butun, e ru ar Gerne-
vez, emañ chapel sant Joseph a vir war he moer-
gerioù, gant graet gant ar mestri-iver Yann Dar-
gent, gindik eus a Zant Servez, e kichenik Landivi-
siau.

Evit gouzout petra oa Montroulez an amzer goz,
gwella a zo da ober eo mont da welet Banell ar Brean
ha ru Gwerziaz gant o ziez koz a venn pokat an til

d'egle; er ru vras, e kreder gwelot o font eus o ziez
reterien vor ar XVI^m kantved, an Tonnemouched,
ar C'herred, ar C'halledod, ar Forgeted, hag ar
Barbud, a rede moriou ar Breiz hag ar Marok oc'h
ober o mistri dre ma 'z aent. An darn vrasa eus o
ziez a zo c'hoaz en o sav, gant o sollerou oc'h en em
astenn an eil war egile, skeudennou sant Jorj, sant
Erwan, santez Mac'harit, sant Yann Vadezour, sant
Nikolas hag ar Werc'hez dinamm ouz o c'haeraat.

Gant ru ar Vur, gwechall, ec'h en em gaved e iliz
Itron Varia ar Vur, savet war ar vogez a ziskenne
eus ar c'hastell da gilha ar ger gloz. An hanter eus
ar ru-se a zo bet freuzet p'eo bet savet ar c'hochu;
en hanter a zo chomet e kaver kaera ti koz a zo e
Montroulez.

E traon eur bla-
senn kilhet gant tiez
koz emañ iliz Sant-
Vaz; savet eo bet
er bloaz 1548 hag ad-
savet er bloaz 1830;
mirout a raer enni
skeudennou koz
hag en o zouez eur
groaz koz bet di-
frammel, war a le-
verer, eus a dre
daouarn ar vori-
nenn gant eur cha-
biten gindik eus a
Blourin en don
c'hoant d'he rei d'an
iliz n'oa bet badezet
enni. Pa dremenas
ar c'har he douge
ilrag iliz ar Vur, ar
c'hezeg ne felle ket
d'ezo mont pelloc'h;
Pa dremenas ar
Vur. En eur cha-
pel vihan, a dre kein



Pont-hent-houarn Montroulez hag iliz Sant-Melani

an iliz, er vered koz, ec'h enorer Itron Varia ar Vur,
patronez Montroulez: eur skeudenn eo hag a c'hel-
ler da zigeri evel eun armel, ha pa vez digoret e weler
enni tri ferson an Dreinded.

Pa dreuzer ar Jarlod, e pont Doulet, e kouezer e
ball ar Boan-Benn, lezhanvet evelde dre ma oa bet
graet d'eun toullad labourerien a labour e-pad ar
C'houarnamant, hag a raer an nebeuta ma c'hellent
dre dno da dapa poan-benn hag a veze gwelot alies,
dre eno, oc'h aveli o fenn.

Dre vali ar Boan-Benn e kouezer e manati sant
Dominik; an Dispac'h en deus pellaez ar vrec'h;
an iliz a jom c'hoaz en he sav; savet eo bet en XIII^m
kantved; gwsa pezh a zo ez eus graet eur zolier en-
ni; pa vezo deuet Breiz war he zo, an iliz-se a vezo
klevet enni, a-nevez, meulenti an Aotrou Doue.

Pa bigner ru ar Vinieg ec'h en em gaver gant
kouef an Ursulinezed; tal he chapel a zo brao da
welet; demost, warlaez da ru ar Feunteunou, ken
serz ma ne c'hell ket ar c'hiri pignat dreiz, e kaver
dismantour chapel I. V. ar Feunteunou hag en o
c'hichen c'hiennou douz skler a red eus eur feunteun
guer meurbed. Ar chapel-se a oa stag gwechall ouz
kouef Karmel.

Evit peurbet tro ker e c'heller pignat war ar
C'herc'hou; ac'hano e weler brao bras Montroulez eus
an eil penn d'egile; pignat a c'heller ivez war dosenn
ar C'hastell; stouz eus ar c'hastell koz ne jom mui
petra nemed an hano.

G. P.

An ao. Doktor CORNIC Rener-meur ar Bleun-Brug

An aot. Cornic a zo ganet e Plonevez-Portzay en dervez
kenta a viz mae 1839. Aboae ma 'z eus anezan, en deus
kavet tro da staga e galon ouz e Yann-vro. E zoulagad o
figeri a weler en dro d'e gwelenn eun tad hag eur vamm hag
ouiz kaeraat ar gend e doa bet, an eil hag egile digant
Doze, n'eur zougenn dilhad
ha ker glas m'o lavaret a-
zet gant danez an oabl
glas.

Dindan ar wiskamant-
e lamme, dre c'has Doze, ka-
lon daou vir vrezid hag a
boanie da zila e kalon ar bu-
get o c'harantez virdik evit
Breiz. Ez vihanik, ar c'hrou-
dur a zeskas, evel ma tere,
anout ha meuli Doze e bre-
zoeng. Bep bloaz, meur a
wech er bloaz, ez ea da bar-
douma da Zantez Anna-Sa-
Pavid a zo he chapel vridet
var zout Plonevez.

Tro-war-dro e barrez,
Breiz kaera bro, a displege
he menziou goloet a vrug
rus hag a lann alsouret, e
meziou truis' ha dushont,
en drevsel, plez-mor Douar-
nenez, unan eus ar skedusa
marzioù a roas d'an douar
maletez an Aotrou Doze.
Yann Cornic n'en doa
c'hoas nemet seiz vloaz pa
welas, e ti e dail, strollad
patroed Plonevez, savet gant
an ao. Madae, o c'hoari Ala-
nik al Louarn ha p'o c'he-
vas o listaga taniou Breiz-
Irel.

Denet en oad a reas e stu-
di e skoli Sant Ysant e
Kemper ha d'e 17 vloaz, dre
e labour aketus, e pignas
eur vachelourien a zigor-
e d'ezan hent ar c'hargou
uhella. E 1917, kee-veur hor
Breiz koz hag a vezo eun
deiz, mar pili gant Doze hag
ar Vretoned, kêr-benn hor
Breiz adsavet, a welas, etouez
he studieren, en den yaouank
gwisket e glazik ha ne
zitez, e wiskanant nemet pa
rankas hen ober evit kreñ-
gant auli ar vedistenez.

Rozon a vank d'ez eur skol-
veur gristen da ober ke-
leuz, alvokaled ha medisin. Evit
he c'hout ar Breizad a rank
mont da gêr Angers. Y. Cornic
a dremenas tri bloaz leun er
« Faculté Catholique » a zo
bet savet eno gant eun Eskob
gindik eus an Alsaç ha bet
kanad bro-gontek plettri war
e vicher, ar Breizad yaouank
e roe iliz Vreiz. Hen eo a zeas
a benn da zavel an emgleo
studieren anvet « Ar vro »
(« La Nation ») hag epad
tri bloaz d'oc'h renk e gen-
vroiz a lakeas etre e zaouarn
ar garg a rener.

N'int ket stank ar c'hendalc'hou
bras miret gant Un-
nitez Arvor ha dreist o gant
ar Bleun-Brug ha ne velet
enno hiviziken an ao. Cornic,
aketus da studia yez,
Irezad, histor ha doareou e vro,
laouen dreist o welet, da
skozia hon stourmerien
kalonek war dachenn an
Alsaç. E Kastell-Paol, e
1921, renerien ar Bleun-
Brug a roas d'ezan eun tes-
ten skedus euz o c'h'ent en
eur filzont emañ ar goll-
da zisplega, er C'hendalc'hou,
doare hor yez er skollou-
mer.

Gant an yonl da beuzezki
e vicher a vedesin, an aot.
Cornic a deulo hag a jomo,
epad 2 vloaz hanter da bre-
deria gant klanvourien an
« Hôpital civil », e Brest, hag
a jelo, e 1926, da dremen
bloaz all e Skolion brez Pa-
ris evit dirrei da Vreiz, gou-
nezet gantan, ha gounezet
e mad-tre », hervez lesteni
e vistr hag areuz e exami-
neuz, ar renk a zoktor.

Breman emañ, evel me-
desin, e Douarnenez. Dizele
d'ar 6 a viz gwegolo, e vo
lidet e eured gant an den-
nez Mari Anna Hénaff,
meurth al labourer brudet,
ar c'hristen leal ha dis-
pount, ar stourmer pennek
a roas lamm d'an ao. ar
Baill e kanton Plogastell-St-
Germen hag a zifenn hirio
ha zrevi, e kuzulh an Depar-
taman gwiriaou ar Feiz, ar
Vro, hag ar Vicher.

An aot. Cornic a geras
war e voadou. E Kastell, e
Brie, a Kameled, e Krao-
zon, e Plouziry, e meur a
lec'h all en deus prezeget
en ano an Engleo gatelik
hag gounez nerezis, entan
an Eskob.

E miz ebrel diveza, eo bet
dibabet gant Strollad rener-
ien ar Bleun-Brug, holl a unan,
evit beza Rener-Meur hon
Engleo. Dindan e veil, skou-
zellek gant ar c'hazulh brez
a zo emañ an Aotrou Perrot, Le
Milon, Lemorier, Madec,
sekretour, ha renerien strollad
Leon, Kerne, Treger,
Gwendal ha Breiz-Uhel, unanet
stard hiviziken e galon hag
a spered, ar Bleun-Brug, harpet
war nezh ar Vretoned a
zeu stank-oc'h-stanka d'en em
vada dindan e vammil, ar
Bleun-Brug a dizeo e vennad-
meur; advelet Bro-Vreiz.

F. AN HADER.

Bleun-Brug ar bloaz-man
eo Bleun-Brug ar vugale.
Ra vezo kargadou anezo e Montroulez
dar 15 a viz Gwegolo a zeu.

AN AVAL RUZ

Eur wech e oa cun den hag en doa daon a vugale hag e vouez varvas. Hen a zimezas neuze d'eun all hag e gouezas; ar c'henta a zegaso eur vrec'had d'in, me rei cun aval ruz d'ezan, unan brao.

Ha setu aet an daou grouadur, keti ketan, hed ha hed d'ar c'haou, da zastum keuneid tamm ha tamm. Ne ouezan ket piau a zeuz da genta en dro.

— Met ar paotr a oa fin; kaset en doa eur penn kerdenn gantan. Hen a stagas e c'hoar ouz ar wezenn hag he dal-dont d'ar ger, hen hi distagas.

— Rot! an aval d'in-ne, eme hen d'e vamm; me eo ar c'henta.

Hanna, va faotr te az po hen; eman er bank, kemer nen, mar kares.

Ar paotr a zigor ar bank, a glask hag a fourbouch; Mamm, eme hen, ne gavan netra!

— Che! eman ebarz, koulskoude, en eur c'hoar ben-nak; sell mat; ez an me da zere'h ar golo; pleg da henn da zellec.

A paotrig a blec e henn da zellec; hag al lez-vamm a hoak, en cun tial, golo ar bank da goueza warnan. Ken jounner e ar go ar golo ken ne drouc'has penn ar c'hez krouadur.

E oa ar zoubenn war an tan ha birvi krenv a rae; ar vouez dinatur a daolas penn ar c'hrouadur ebarz. Dem-goude setu ma teuas ar vere'hig ivez:

— Pelec'h em va breur, en zi?

— Ho preur a zo net n'ouzon ket da belec'h; adrevn an ti, marteze, da zehri e aval ruz. Kerzit da welet.

Hi a va da zellec hag a ra an dro d'al liorz; n'her c'ha-ven ket, emezi.

— Deuit atao aman, e keit-se; ha c'houi a rei tan din-dan ar zoubenn.

— Dous ha sentas e oa ar vere'hig; hi a daotas he bre-c'had keuneid en tan hag ar zoubenn a en em lakas da virvi.

Met lavaret e vije e klevet eur vouez glac'harus o tont, n'ouzon ket eus a belec'h.

Hag ar vouezse a lavare:

Tan bihan, va c'hoar, ta bihan,
Rak loski a rin.

— Mamm, a lavar ar vere'hig, me gred eman penn va breur er zoubenn.

— Ya! m'arvat, follez; eur penn leue em eus laket ebarz. C'houezit atao war an tan.

Ar c'hrouadur sentas a en em lakas da c'houeza, gwel-la ma c'helle hag ar vouez a en em lak ivez da hirvoudi:

Tan bihan, va c'hoar, ta bihan,
Rak loski a rin.

— Mamm, eman penn va breur er zoubenn ne lavar d'ec'h; n'her c'hlev ha n'her gwel.

— Serrit ho kenou, genaouezez! Trell a ra ho taou-lagad.

Da grestez pa voe desket ar skudelladon eur vouez a lavaras d'ar vere'hig:

— Kerzit da gas ar skudellad zoubenn-man d'ho tad a oz o troucha lann, e penn an donarou.

— Ya! eme ar vere'hig; hag hi a yeas a-henn kaer, Met, evel ma 'z ae war an hent, hi a gavas eur wrac'h:

— Da belec'h es ez te, bihanig, gant da skudellad zoubenn?

— Ez an da gas e verenn d'am zad, a zo o troucha lann e penn an donarou bras.

— Ken 'ya, va vere'hig; met selouu mat ar pez a lavaran d'it; p'en devezo da dad debret e skudellad hag an tamm kig en den laket da vamm warni, te a zastumo, gant evez, an cil goude egile, holl an eskernigon a daolo war an donar ha te 'z ay warierc'h d'o gwalc'h da feunteun Sant Per.

— Ya, a-walc'h, a respont an hini vihan; me ray evel ma livrit.

An tad a zehri e zoubenn ha pa danva an tamm kig, hen a gas gantan em c'houek. Met, kerkent ha ma taole eun askorv, ar vere'hig hen dastume.

— Petra ri te gant an dra-ze, emezan?

— A feiz! c'hoari.

Hag hi a yeas neuze war eun d'ar feunteun evel o gwalc'h. Hi o gwalc'he brao en dour skler hag o zape neuze, unan e tal an all, da zec'ha war eur maen.

Met petra zo c'hoaz 'ya? Oueza a ra ar vere'hig; rak an eskern, kerkent ha ma oant sechet a zave, a rize; hag a yeas ne ouiet ket e pelec'h. Ne jome ket mui nemed unan gant; hi her c'houzas en he monchour, en noan ne rize evel ar re all ivez. Met, war an hent d'ar ger, ar plac'hig a zavas c'hoant gant da c'houeza he ri.

Hi a zisplegas he monchour hep sonjal hag an askorvig a oa ebarz a nijas neuze evel ar re all.

Ha pa oa erru er ger, hi a glaskas atao he breur: E pelec'h eman hen aet, emezi? Me garfe kaout eun vamm aval digantan.

— Ho preur a zo e liorz ar c'hanab, a-treus an ti; ma fell d'ec'h kaout eun tamm aval, kerzit d'her gou-lenn digantan.

Ar vere'hig a zo e liorz ar c'hanab, a-treus an ti; ma fell d'ec'h kaout eun tamm aval, kerzit d'her gou-lenn digantan.

Ar vere'hig a ya d'al liorz; ha pa 'z eo erru, hi a glev unan o kana.

Plou a gane evelse, war don ar baradoz?

Hi a zell du-hont ha du-man, en traon hag er laez hag hi a wel he breurig o kana war lein an ti:

— Va Mamm 'deus va lazet
Va zad 'deus va debret
Va c'hoar 'deus va goalc'het
Ker, ker, ker
E feunteun Sant Per.

— Te a zo aze, va faotr?

— Ya, va c'hoar; ne fell ket d'it dont davezon?

— N'ouzon ket penaos ober evit mont!

— Me 'm eus eur chapelid hir, hir, hir; me a daolo eur penn anezan d'it; te a grogo emann ha me az enno neuze davezon.

Kerkent hi a wel eur chapelid o rinka war an doenn hag o lekoun betez erit. Hi a grog emann; ne oa ket pouinner bras anezhi hag he breur a denn e c'hoar dave-ton d'ar baradoz.

Wardro kuz-holl, evel ma teus o zad d'ar ger ivez, hen a wel e grouadur pignet war lein an ti hag e grouadur a gane:

— Va Mamm 'deus va lazet
Va zad 'deus va debret
Va c'hoar 'deus va goalc'het
Ker, ker, ker
E feunteun Sant Per.

— Te a zo aze, va faotr?

— Ya! va zad, deuit ivez davezon.

— N'em eus skeul ebet da bigant.

— Hanna, krogit em chapelid, me denno warnan, ha c'houi a grapo gantan.

An tad a dap krog eta er chapelid hag e baotr a denn warnan; met pouinner e oa an den hag hen a jomas, en hant-her, er purgator.

Ar tennad a dap krog eta er chapelid hag e baotr a denn warnan; met pouinner e oa an den hag hen a jomas, en hant-her, er purgator.

Koulskoude ar vouez a oa souezet, dre ma ne wele hini o tistad ouz ar ger, hag he den, hag e vere'hig.

Hag, enad n'etlo o youc'had d'ezo e toall an nor, hi a glevas unan hag a gane evelhen, war lein an ti:

— Va Mamm 'deus va lazet
Va zad 'deus va debret
Va c'hoar 'deus va goalc'het
Ker, ker, ker
E feunteun Sant Per.

— Te a zo aze, paotr?

— Ya; mennou a rit c'houi dont ivez.

— Marteze ne c'hellin ket.

— Krogit em chapelid ha me denno warnan. Hi a grog er chapelid hag hen a denn ar pez, ma c'hell; met re pouinner e oa al lez-vamm hag hi a gouezas.

Hi a gouezas en hent.

Ritc'h ha strivet e Landevan ha roet da Zihanamb ganen-me.

J. BULEON.

Chapel Itron Varia Kernitron e Lanmeur



En eur c'hoadig fao, e tu an hant-her-nor da gerig Lanmeur, em chapel Kernitron, — gant he mogeriou mein velen hag he zour beget gant mein sklent, — unan eus chapelou karela Bro Dreger, dre m'eo kemeret gant ar bobl evit mamm an holl Itron a zo deuet d'en em skigna ha da vleunia, er beg-douar-ze, gant an amzer.

Pi X o vesa deuet da c'houzout peger kare o ar chapel gouez, gant Tregeriz, a roas d'izi eur gurunenn aour ha peleze a vo lakat, gant lid bras, war benn he Gwerz'hez vanniget, da zez Gouel Maria Hant-her Eost 1909.

Kernitron, eme an A. Abgrall, a anavezet ker mat traou kaer ar Vro, eo kaera tamm labour rounek, — da lavaret eo savet e giz ma ouie sevel tud Rom, — a zo e Breiz-Izel.

war-stro da Geraez, eun den falliack ha divergant hag en devoa jont da veza roue e Breiz, a roas d'e intanvez dimezi gantan hag a vennas goudeze gouarn mab Iona hag an Donnone a-bez. Wardro ar bloaz 526, Kononor a oa o c'hoar er Vreiz, er c'hauc'hoal ha Lanmeur, eu eur chaste-koz ha ne jom mui anezan nemed al leurenn hag an douzezon, pa welas eun dervez o tont davezon eun denig yaouank, lunn wad e dreid, e zillad e trilhous, skeut maro; ar paotrig-se oa Melar, mab Miliau, kont Kerne a oa bet lazet gant e vreur Rivod, Henann, evit lenna goull-degez eus e dorfed, en devoa touellet Keritron, gouarnner ar prins yaouank, ha touet e roje d'ezan, ma lasje Melar, an holl zouarou a weler diwar lein menez Fruy.

Melarg, o vesa deuet da c'houzout ebet o klask lannet e vitez digantan, a de'has e kreit an noz, e-unan, war e droad, dre an hent koz a yeas eus a Gemper da Geraez, dre Gorre ha dre ar Menezion Du. Kernez ou k'ebenn Kononor ha Melar a grede e c'helle en em gant en d'iz; n'her c'hasas ket er ger ha setu hen ha dao, war e lere'h da Lanmeur, dre Lanneanou, el lec'h ma viret, en iliz e skeudenn, — eno e treuzas eur war hag a hanvet c'hoaz Dour Melar, er XII^{me} kantved; ac'hano ez eus da Blouigne: chapelou a zo bet savet, en e enor, en dsoou lec'h ma chomas da ziskuita hag e Koadon e Lanmeur. Kononor n'oa ket deuet da veza c'hoaz an den digalon e voe dizevatoch digemeret a eure ar prins yaouank gant madeleze hag roas d'ezan e c'her n'en em gavje droug

Albert Le Grand, eun dominikad eus a Vontroulez, a lavare ebet savet iliz Kernitron gant sant Samson, eskob Dol. Kerig Lanmeur, hanvet neuze Kerfeunteun dre ma oa eno eun c'hoar enoret gant an Drouez hag a red atao dindan aoter vras an iliz parrez, a oa bet roet da zant Samson gant Judual, kont an Donnone, wardro ar bloaz 556. Setu aman penaos e tigouezas an dra-ze.

Goude maro Iona, kont an Donnone, — tad Judual — e enebour, Kononor kont ar Pober, — ar vro a zo tro-

ebet gantan keit ha ma chomje kuzet a-dre kein mogerion kastell Beuzit.

Antronz e voe gwelet oc'h en em gaout eno Kerolion hag e vab Justin o devoa heuliet roudou Melar hep gellout e dapa. Ober a rejont an neuz da gaout keuz d'ar pez o devoa griet. Melar, hep difizians, o fardomas hag o fedas zoken da joni da gousket en hevelep gwele gantan, heveze giz an amzer-ze. Wardro hanter-noz, an daou dorfetour a zavas evit laza ar poatrig; Melarig, dihanet, en eun taol, a c'hellas lammet, dre ar prenestri, er miz; Justin, o klask mont d'e heul, a dorras e henn o koueza e tron an douvez. Kerolion, n'ea en c'hilazas ket, en e lamm, met ne dukas ket ar prins a oa aet, d'ar red, eus ar Veuzid betek leuz-ger Lanmeur, el lec'h ma 'z eus eur men hag eo chomet warnan c'hoaz roudou e droad. Kerolion, d'e dro, p'en em gavas e Lanmeur a c'houlilas an tiez hag a deus ad-henn da gaout Melar; trouc'ha a eure d'ezan e henn ha goude hera e lakel en eur sac'h ler ez eas, d'ar red, da Gemper. Doue a gasitaz an dorfetour hag e vab Rivod e-unan a varvas evel eun den daonet.

Konomor a lakeas sebetia relegou ar merzer yaouank e iliz dindan zouar Lanmeur. E vez, ul laouer yaen, a welil betek an XVIII^{vet} a-zioch'an noter vras ha diskouez a raer c'hoaz, en eun ti eus ker, al lec'h ma voe dibennet. En eur c'hoaz enna e skunden hag an tacho, liou ar mergl a zo war ar voue a leverer a zo tacho gwad strinkek dioutan p'edod ouz e laza.

Goude an darvoud glaz-c'haruz-ze Konomor a veas da joni da gantell Moutadilant, e kichen Korsuel, e penn pella an Donnone. E c'hoant dastum dunvez a reas d'ezan klask en em zizober eus e-lez-vab Judual met hennan harpet gant sant Samson hen trec'has e emgann ar Belg, e Plouneour Menez er bloaz 348. Epad an tri dervez ma padas eno ar gant Samson a oa chomet da bedi war Menez Arrez evit ma vije Judual trec'h d'e enebour, ha setu aze perak, da gredi eo, eo bet ar chiz, ec'houdevez, gant sordardet Breiz da youc'hal, pa vezent o vont d'an emgann; *Sant Samson!* sint Samson! Judual, dre anaoudegez vat, a roas da zant Samson, evel n'ea eus henn lavaret diaraok kerfeunteun el lec'h ma savas e vanati bras (Lan-neur); Menech-Lan-meur, goudeze, eo a zavas Kernitron.



Sant Melar
hevez m'hen diskouez
e chapel ar Mouter, e Plouezec

Hevez d'arall all, iliz Kernitron a zo bet savet gant Santez Triphina, gwreg ar roue Arzur, pe gentoc'h, eil gwreg Konomor, a zo bet lakel he buhez reuzdukl, e gwerc, hag a veze c'hoarriet gwechall goz eus an eil penn d'egile da Vreiz-Izel.

Eurus e oa gant he fried e kastell ar Veuzid; demodst, e kastell Kervouran, edo he breur, den kriz, gouest da ober an torfejou gvasa evit kreski e zanvez. Hogen roue Bro Zouo, biget gant al lorguez en dou lavaret d'ezan e roje d'ezan e vech'ha da zimezi hag an hanter eus e rouantelezh ma kavje an ju d'e bara. Eur wrae'h koz a lavaras d'ezan ne oa ken louzoz ouz eun hevelep klenved nemed big rustet eur hugel nevez gant e omenn rouaned. Evit kis d'ar roue eul louzoz ken donjerus hag an dra-ze, Kervouran a laeras ar Mabig edo Triphina o paonez genel, met eur gwall var-samzer a stlappas war ar reter al lestr a gase da London, mañ Triphina hag e vageret, eskob Sant Malo a



Triphina

oa war an aot p'en em gavas al lestr da bensa hag a roas digemer, en e di, d'an daou douez.

Kervouran, o welet e oa laziet war e daol, a en em lakeas da goll brud Triphina o lavaret eo hi he unan eo a oa en em zis'chraet eus he mab. He gwaz, re vuan da zelaou ar gwall deodou, a glas-kas he laza rakial; tec'het a c'hellas, a drugarez Doue, betek Alanson hag eno, gwisket e paourz, ez eas da zionall moc'h eun intron binvidik. Ean dervez, e welas o tont e porz ar maner m'edo ennan eur marc'hez hag e vennas gand ar gwel anezan hepken koll he anaoudegez; he gwaz an hini e oa; mont a eure davei gant komzou a geuz, a drez, a garantez hag a denegered; Deset e oa da c'hoazont ne oa netra da damall d'e wreg hag e oa deuet d'he c'her'hat evit rei ar c'henta.

Triphina a zizrous d'ar Veuzid: he euruset ne badas ket pell; war he goullenn, he gwaz en dou pardonet e falgriez da Gervouran, met hennan a doullas ker bruo e vreur kner m'heil lakeas adarre da vont e kominar rus ouz e bried; he stleja a eure d'al lez-vern hag eno e voe kondonet da veza dibennet. Edod o vont da ober he stal outi pa weljed o tont d'an daou lamm, war eur marc'h, eur poatrig kosant, evel an deiz, eur c'heze en e zour. Heneze eo mañ Triphina ha Konomor, a oa bet savet e kuz gand eskob Sant Malo ha digaset gant hennan, war urz Doue, evit savetei e vamm. Ar poatrig a gerz war eun etrezeg Kervouran, hen tamall hag her sko e kreiz e gof, gand e gize; e Kervouran, o welet enno o vont da vervel a anvaz e wali deodadon hag a varz pardonet gant Triphina.



Maner Kervouran, e Lanmeur

c'har, etrezek ar Werc'hez he doa he diouallet hag e savas ke he enor eun iliz kaer el lec'h ma tremenas hiviziken ar pep brasa eus he amzer hag a voe hanvet en abeg da-ze *Ker 'n Itron*.

Setu petra leverer, er vro, diwarbenn Kernitron. Buhez Santez Triphina, pa veze diskleriet, gwechall, gand eur strollad c'hoariterien vat, evel ma oa e Lanmeur, a lakae an deroas da redet, Triphina a zo bet pried Konomor epad daou vloaz ha marteze a-walc'h eo bet o chom er

Veuzit a-raok ma voe lazat gant he fried. Met Kernitron, a zo eul lec'h hanvet evelde, sur a-walc'h, kentoc'h en enor da rouanez an neuv eged en enor da eur rouanez eus an dour.

Sant Magloar a voe kenta abad manati Lanmeur a voe diskleriet ha deuet gand an Normaned, er bloaz 877. Goude ma voe trec'het ar re-man e Trans (937) an ilizou diskleriet gant laeron an Hanter Noz a voe adsavet. Menech-Sant Beneat Sant Jacut a gasas unan hennak eus o c'hen-vreudeur da Lanmeur, adsevel a rejont an iliz parrez ha chapel Kernitron. Er bloaz 1163, menech-sant Jacut a c'houarne parrez Lanmeur; an hanter eus deog ar barrez-ze a oa d'ezan, hag eur gwir bennak o devoa war iliz Plougasson. Ar vech'ha a zavas e Lanmeur eur c'hlanvidi, klanvidi sant Koulomban a deus da veza, divezeoc'h, ti dud foll ar vro-ze; eur c'hlanvidi all, el Laourou, euid an dud lor, en devoa, evit patronez, santez Mari Madalen, hag eun ti euid ar bardonerien, an *hospital pell*, war hent Lanthion, tost d'an hent bras a heulie pardonerien Trevez.

Er XVI^{vet} kantved, abati sant Jacut a gouezas etre daouarn diavezidi; menech Lanmeur a rankas tec'het, met Kernitron a jomas slag ouz eskopi Dol betek an Dispac'h. Kenta gouarnar Kernitron a anvetez eo Fransez Goebriand, beleg, mañ hena ar Roslan, e Plougasson. An hini a deus war e lec'h, Yvon Arel, aotrou Koulmen, chaloni Landreger, vikel vras Dol a lakeas moula, er bloaz 1627, e ti George Allienne, e Montrozier. *Buhez sant Melar*; n'her c'haver ket ken, koulz lavaret, e nep lec'h. Goude ar bloaz 1630, Kernitron a voe gouarnet gant Fransez Golegion, aotrou ar Gaudinaye, chaloni Landre-



I.-V. KERNITRON

Adrian Lezormel, aotrou Lezormel, e Pleslin hag an Tourhelou, e Lannedern. Kana a raer c'hoaz, er vro, eur werc'hev savet war an torfed-ze.

Fransez de Hecce, vikel vras Dol, breur an Aotrou 'n eskob de Hecce, a voe fuzuilhet e Gwened, er bloaz 1795, a voe diveza gouarnar Kernitron. Ar chapel a voe lakel, e gwerc, gant an Dispac'herien er bloaz 1791, ha prenest evit 5,000 lur gant Sebastian Trogoff, breur person Lanmeur, ha breur an amiral Trogoff a zavas er vana, banziet gwenn ar roue, war e lestri, e porz Fonton, er bloaz 1795. Ar chapel a jomas digor evelde d'an dud da vont da bedi enni, hag er bloaz 1828 bugale ar prenest her roas da iliz Lanmeur.

Ahaoc, an dud a gendalc'h da vont da bardona da Gernitron hag an Aotrou Dupare, er bloaz 1909, pa c'houlennas ar gurunenn aour evit Gwerc'hez Kernitron en deus lakel chapel goz Tregeriz war renk ilizou ar Folgot, Rumengol hag Itron Varia ar Porzou.

Da c'houel Maria Hanter Eost 1909 pa voe kurnet Itron Varia Kernitron e oa e Lanmeur, en dro da arc'heskob Rozson an A. Debourg ha da eskibien Breiz, onn-penn 12,000 den o kana meulder ar Werc'hez.

Iliz Kernitron a zo unan eus hon ilizoù o deus ezomma da veza miret gand ar brasa prenest; n'eusket kosoc'h eget; ar pennad moger griet, da ziveza, a zoug eo bet savet er bloaz 1441; ar pezh labour sebrusa a zo e Kernitron eo ar porched e weler ennan H. Z. Jezuz-Krist, ar pevar avicler en dro d'ezan. E diabar an iliz, goude ar Werc'hez kurnet ar pezh a zo da welet eo ader santez Anna, skunden an Dreinded, an Ecce Homo, taolennoù ar Gouz ziveza hag ar Rozera ha beion aotroued Kerbrint e Sant Yann ar Iiz.

Maner Kervouran a weler c'hoaz, e tu ar zav-beol; diskouez a raer c'hoaz *Kambe Wenn* Triphina hag ar prenest oc'h en em daolas dreizan pa glevas petra diamalle d'ezan ar pezh fall a zen ma oa he breur Kervouran.



Porched Kernitron

ger, a oa skanvhen ha trabaser a-raok mont da veleg hag en doa lazet er bloaz 1624, war al Leo-drez, etre Pleslin ha Lok-Mikael, dre warizi, e amezog ha mignon

Kaout a reer dre ar bed tud berr-welet hag a gustum sonjal : — O ! ar Vretoned ! tud an divezadoul ! tud ha ne ouzont ket hale gant o amzer ! tud an amzer goz ! —
 Koz eo gouenn ar Vretoned, va, p'eo gwir eo gouenn euz ar re gosa er bed. Ne valeont ket da heul kement nevez-zent zo, mad pe fall : gwir eo c'hoaz. Met evit beza pao-tret an divezadoul... a ! va haokit da c'hoarzin ! Er peñ araoz eo emaoñ bepred, ha pa ne ve nemet evit ar genvezterien e ti Kannad ar Plougastelliz a zo kenta ken-vezterien ar bed ! — Ha Roskoiz ha Kastelliz ha kalz re all ne jomont ket da c'henaoñ ivez !

Eur Baradoz an douar

Etre hag ar Haz ha Beg Lok-Maze-Penn-ar-Bed emañ porz Brest, goudeud mad, eul lenn klouar ha pisi-vidik. Em e greiz, etre an Elnon hag an Aon, war eun dougen hag a zo evel lost imenez Anez o koueza er mor, parrez Plougastell (7 mil den emañ) ne zant ket an avelachon yenna, ne anavez ket kalz ar skourm hag an erc'h, ha n'eo ket dis-gus da zougenn leunmachou, gwiniz, frouez, ha dreist-holl sivi, (Kentoc'h, araoz amzer ar filoxera e welet gwiniennou eno ivez.

Tri c'hant vloaz zo, pe war dro, e'ch en em lakas Plougastelliz da lakaat sivi en o farkerier. Eun Tad Je-chill, hag er blaev 1744 renez « *Jardin Botanique Brest* » a gasas da Blougastell sivi en devoa nevez bet evit sikour da gaout plant mad da rei.

Evel just, er mare-se ha betek pell goude, sivi Plougastell a voe dreht ha gwerzet er vro : e Brest hag er bour-kou elec'h ma c'helle kirri hor c'henvroiz kas ar varc'hadourez sasin. Ne gouste ket goall-ger, pa 'z eo gwir er blaev 1839 ho poñ eul lur evit ho kwenneg, pa n'oa ket gwelloc'h-marc'had c'hoaz.

Atao gwelloc'h gwella

Plougastelliz o devoa kalz bugale, a drugarez Doue ; ar mor a roe dezo bizin fors pegeant, n'eo ket hep poan, met hep re a vizou ; eas oa dre-ze labourer an douar ha tremp. A vloaz da vloaz ive, an dud a glasko gwellaat ar gouennou sivi, beza re nevez ouz dounn an Arvor, di-laba ar re a rofe ar muia frouez hag ar prima ha rei da anaout d'ar genvezterien ista.

Pa zindilas ar brezel 70, siviennerien Paris a voe rivinet : obuzou ha bolodou ar soudarded o devoa distrujet net o farkerier. Setu ma teuas Parizianed da breza sivi e Plougastell. Paotrel ar C'hreizdeiz a rea evel-do, Saozoun a heñtalz ar skouer — ker bras zoken ma teujont da breza an eost ruz penn-da-benn.

Met e 1879, Plougastelliz a zontaz evelhen : — Mo deuz ar varc'hadouren saoz gouindegez o tout aman da breza hor sivi hag o vont d'ar ger en dro d'eo zwerza, perag ne datemp ket, ni ive, da ginnig d'ar Saoz en o bro ?

Mont a rajont eta da Vro-Zaoz, dre Zant-Malo ha Southampton. Met re bell edont euz al linenn houarn. Ar bagou ne deant ket buan a-walc'h. Ar sivi a ranke gortoz tri ha betek pemp devez abars beza var ar bla-senn : kalz anezo a veze brein ; hag elec'h gouind, hon tud n'o devoa nemet koll.

Red e voe klask ar gouennou prima ha dreist-holl kren-ta : ar re en em blije ar muia gant douar Plougastell hag a blije ar muia ive da dud Bro-Zaoz. An *Docteur Morete*, an *Noble, Daxton, Royal-Sovereign, Madame Moutot*, a zo skignet ar muia breanna.

Ar sivi en hent

E 1896, an no, Leon-Gwillou ar Rouz (breizad bet kenta e Manchester), anan gant an no, Perier, a alias Plougastell da gas o sivi var eun euz Plougastell da Blymouth, gant listri-dre-dan. Dek pe zaozeg eur beach a oa a-

walc'h. A Blymouth ar sivi a gendalc'he varza Manches-ter, Birmingham, Liverpool, Londrez ; 36 eur goude beza bet karget e Plougastell, ar sivi a veze gwerzet dre Vro-Zaoz frouez pelloc'h a vije koll ar varc'hadourez.

Epad pevar bloaz an dud a welaz petra c'houneze ar re o doa bet hardizegez a-walc'h da zigeri hent d'ar re all. Diwar neuze e voent troet holl da lakaat sivi muia ma c'hellent ; abars nemeur e voe costet diou ha teir gwech muioc'h anez.

Hag emgleonion a voe savet e parrez Plougastell emgleonion krenv meurbet ha renet gant tud a benn : an Union ar Shippers-Union hag ar Syndikat F. F.

Bep bloaz brevioñ an emgleonion-ze a laka ober gwestion eleiz (kant milieroñ), e kost skav, holl henvel, doare-vel evel ma plij d'ar zaoz. Hag abaoes eur pennad, e reont ober dreist holl bernion kajouñ, plas enno da be-der banerig a tri pe bevar lur sivi.

Ar siviennerien a gemer ar gwestou hag ar c'hajoioù, hag a va ganto d'o farkerier da zastum o sivi. Ha bendez d'an eur merket d'ezo e tigasont anez d'ar c'homis. Peb emgleoñ en deus eur c'homis kouls lavaret e pob keria-denn, karget da zigemeret ar sivi, d'o foneza ha d'o faez ; da glask ar gwesturioù ivez, pe ar c'hirri-dre-dan, d'o c'has goudeze d'an Treiz.

Er bla-ma, betek ar 25 a viz mezeven an Union e deuz kaset 95,771 kajoad sivi ha 13,796 sac'had piz bihan ; ar Shippers-Union o deuz kaset 93,308 kajoad-sivi ha 13,889 sac'had piz bihan ; ar Syndikat F. F. o deuz kaset 80,760 kajoad-sivi ha 9,564 sac'had piz bihan.

D'ar renerien eo goude karga ar varc'hadourez war al listri ; d'ar renerien eo ive c'hench hent d'al listri e kreiz o beaj, dre an T. S. F., pa glevont e vezo kavet freed d'ar sivi e lec'h ma 'l lec'h gwelloc'h eget e lec'h all.

Renerien all, eur c'houec'h hennek a va da jom da Blymouth ha da Vanechester epad an hanv. Reso a reont ar sivi. O c'has a reont d'ar c'herioù all, dioc'h ar c'hour a glevont gant Plougastell o chom e Bro-Zaoz ama hag abont. Teulez evez a reont ouz an Her-Kenwerz, ouz ar varc'hadouren, ouz ar Saozoun paet ganto.

Me respount deoc'h, ma zeuz labour skriva liziri, kas depehou, telefoni, kelenn ha beza kelennet, e magjenn Syndikat sivi Plougastell, e magjenn an Union hag en hini ar Shippers trevel ha tregas zo ive gant Plougastelliz Bro-Zaoz. Na kaer eo an unvanizez, etre an holl labourerion ! Na pebez speredou kaer a dud eo ive ar geria-ded gonest da gas en dro eun hevelep kenwerz.

Hag ar sivi divarlec'h ?

Skiaer eo, an darn muia euz sivi Plougastell a vez de-ber e Bro-Zaoz. E 1920, e voe gwerzet 425 tonnenno eno (freed oa bet en em rapari eun tachad, goude ar brezel). En 1923, ouzpenñ c'houec'h gwech muioc'h : 2,051 ton-nenn. E 1924, alio muioc'h : 2,779 tonnenno.

E 1920 : 17,037 tonnenno ; e 1921 : 22,936 tonnenno (met ar bla-ma ne dalv ket koulkoude ar blaev trenenet).

Lod a zont ne vezo morse gwerzet kement en tu all d'ar mor, abalamour m'en em laka ar Saozoun da ober sivi ive. Evelke an ao, Maturin Thomas a welas e Man-chester, e 1924, eur zaoz hag a verzaz 8,000 gwestad, da lavaret eo 24,000 lur.


Ha' re all, eme an ao, Mear, a rea kement hag henvez :

Ne lavaran ket. Met keit ha ma vezo hon Arvor klouar-roc'h eget Bro-Zaoz, keit ha vezo labourer gant evez, ekiant hag unvanitez e Plougastell, e c'hellimp beza di-zors.

Fors aze, ato e chom sivi ha n'o deus gettel darevi nemet re zivezad. Kentoc'h e vezent kaset da Paris. Met a vloaz da vloaz ar mizou-kas a zav spontus. Setu ma vez gwerzet nebeutoc'h-kenneka : 478 tonnenno, e 1921, 324 tonnenno e 1922, 165 tonnenno hepken e 1924.

Dre ar Finister eo e vez kaset eun nebeut tonnenno all ; met rabat zo var ar prix ; ar Plougastellad ne c'hounit ket keiz er c'his-man.

Met petra ! spered an den a zigor dre ma zeuz exom ha Plougastelliz o deus savet uzinoñ da ober konfiter



Plougastelliz o tastum o sivi

Cl. Vio e la Compagnie.

gant o sivi diveza. Ra ne jomo netra da goll! Gouindegez adarre. Konkurans ive. C'houec'h uzin a oa bet savet e 1925, ha re all a zo sonj da ober.

Pebez gounid ?

Etre an oll siviennerien, n'eo ket eas gouzout ar gount da just. Klevet e vez tud o lavaret : 15 million. Re all dioc'hita a rabat eun d'erec'h : 10 million, emezo. Ya, etre c'houec'h mil den, pe var dro.

Ar pez zo sur eo Plougastelliz a jom fidell d'eo emgleonou ha d'an hini a c'hasas hepred war an traoz, an so. Thomas, o mear fur ha gouziek, o rener eveziant.

An ao. Thomas

Mathurin Thomas d'oc'h ar gwel anezan, ne deo nemet eul labourer-douar, gwisket e gir Plougastell, gwenn e vior, lenn e lagad, sarret stard e vuzellou ; muioc'h a zontou eget a gomzou, muioc'h a oberiou eget a drouz. Ra vezo meulet Plougastelliz, hardis ha mat da labourat ; ra vezo meulet an ao. Mathurin Thomas, ken diaz a amoudegez vat hag a respel, asman gant renerien all an emgleonou, en eun roel holl evid mad o c'henvroiz.

VISANT INIZAN.

labourez-douar, Kannad Penn-ar-bed.

AN DILHAD KAER

Ar vugale a vez gwelto e tec'hed dilgad o dilhad, dre ma kreskont ; met an diskoaz c'houec'h-zef gant an dud vras, nemet hirio. Dilhad re veir ne vezent gwechall sellet nag evel dilhad brao na dilhad dezel ; perak ez eo ar c'houec'h hirio ? Daoust ha berriet an dilhad a vefe grêt, dre ma kresk, dre ma astenn ar spered, rak beza 'zo elez a dud hag a lavar eman ar spered war greski ; gant se, eur c'houiz a dilefe en em gaout hag ez ale an dud e noaz ; met neuze en em gavet en hevelep pal gant an dud gouez !

Ezomm ebet da adlavaret ez eus daon dra rekis evit ar pez a hanver spered ; deskadurez ha deskamant, an eil kompouez gant egile. Gwelloc'h eo, koulskoude, deskadurez hep deskamant eget n'eo deskamant hep deskadurez. Ar re goz a ouie mat an dra-ze hag a lavare :

Gwasoc'h eo eur zoid desket
Eget eur zoid ha nan eo ket.

An dud a hirio, mar o deus deskamant a-walc'h, — lakomp o defe, — o deus nebeut a zeskadurez, ar pez en em ziskouez en doareou, e meur a stumm, ha dreist-holl, en o gwiskamant. N'ouzont ket da vihanan-petra eo eun dra gær.

Penos e c'haller, evel ma 'zo hiniennou mat etouez ar merc'hed, dilezel ar mouchouer bras, an lavanjer, ar c'houez gwenn dantelezev evit en em lakaat an eur-seurt saeh henvel ouz eur gwiskamant p'or ha kemer war ar ve ket henvel, kentoc'h, ouz eur gastoldenn pe eur zaill divroget ?

Mar o dije hon mestrezed-skol kemeret amzer da studian dirak o merc'hed yaouank, petra ra neun-petra ra kaerder eur wiskamant ! Dispaket o dije bet dirazo t'olennou livet gant Iverien H'itus ha diskoazet d'ezo pe-gret dilouz ober plegion betek an douar. Er Jude, ar gouel a gouez, eun tamm egiz eur mouchouer, diwar diousoz ar merc'hed, en eur ober endro d'ezo plegiou d'us d'al lagad.

Na gomzomp nemet eus eur c'houiz hepken hag eus eul liver, ha kemeromp t'olennou Raphael, unan eus ar gwellan dornet ha speredek Iverien a zo bet diskoaz war an douar. En e zoure Iressan ha livan, en doa dastumet ar pep gwellan grêt en e rök ; en e c'houde, den n'eo bet et en tu all d'ezan.
Gwerchezed Raphael a vo brudet e peb amzer. Kavet

e vez anezo e pevar c'horn ar bed e palezio ar rouanez hag an dud all en em gav a-vechou endro d'ezo ha d'ar Mabig sevez ? Ha laket en deus d'ezo eun dra hennak henvel ouz dilhad berr ha striz ? Nann, atao eur wiskamant ledan, e doare ma kouez en eur ober plegiou da dilgad d'al lagad ha da greski c'houz gened an neb eo savet eno e boltrud. *Gwerchez Folligo, ar Werc'hez kuranel, Gwerchez Sant-Sixt*, ha ped ha ped all' o deus holl eur wiskamant kaor da laret eo, lioutou pep pez anezan o klotan an eil gant egile hag an danvez felis ha frank, evit kaout tu da stumman linennou ha plegiou.

Red eo lavaret eta penos an dilhad a neun eo ar re a loutan ar mutan ouz ar re-ze. Hogen, pa zeller ouz gwiskamant merc'hed Treger ha Leon, e kaver gant o mouchouer bras eun tamm henveldigez ouz ar gouel a ra ken brao war ziouskoaz gwerchezed Raphael ; ar vroz gwechall he doa plegiou ivez. Ar c'houez evel n'eo douget c'houz e parrotzioz a zo eus Gwened, Kerne, Treger, a ro l'fr ha gened d'an dremm an distaran.

Gweli, avat, eul liver poltreion hag en deus jin ; diskoazet d'ezan an hevelep maouez gwisket gant an dilhad berron a oa gwechall ha, goude, gant ar re a-vremen ; a dra zur e lavaro d'ez e kemer ar re goz evit tenna he foltrud. Perak ? Endra ma oa brasoc'h ar c'houez digoroc'h, hag evel pleg, linenn ha lion, p'ividikoc'h pep pez dilhad.

Karout a rafer gwelet tud eus ar vicher o n'em lakaat da ziskouez talvoudegez hon gwiskamanchou, en eur rei da amout pere eo, 'vit eur pez dilhad, ar merkou a vrasventez.

Tremen poent eo trei selou ar yaouankiz warzu gened hon bro ; anez, e kollint krenn, hepdale, pep galloud d'he zanva.

E.-A. MOAL.

G. S. Gant plijadur e lennomp war ar c'hazetennou e 'z eus savet prizioz, e Kemper, evit ar gwellan labouriou grêt e Breiz, gant artizaned, brouderezed ha t'olennerien vreizad.

Al labouriou a renko bezan stummet en eun doare breton nevez (style breton moderne).



Plougastelliz o kas o sivi d'an Treiz

Cl. Vie à la Campagne.

DISMANTR JERUSALEM

Mouga reas ar gomz en e gorzallhienn; 'vel pa vije re zister ar gerion diouz ar pezh en doa da lavaret.

Ostaleri *Leon Juda* a yea hag a deuz ar vuhez enni; an dervet eur a oa d'an heol; estranjourien, kouls hag tud an ti a oa war zao; reuz mont endro a oa gant ar re-ze, goude reuz an digouez. Breman, e sonjet adarre er veaj d'ober evit mont da gaout o ziege-zelet, evit darn, e-pell bro. Goude paeon o skodenn, e tec'hent, darn war droad, darn war ezen, darn all gant muled pe zoken, kanvalet. Hini anezo n'en doa seliant f'ac'hout ar c'helou mat; mouez ar bastored he doa o lezet diec'h. Tud berr a spered hag o c'houzout e oa barr ar profeson a gavje breman, bemdez, digarez da c'hervel ar Mesias, ha d'hen lakaat da c'heneh. Pion oa ar re-man hag a gase da bevar c'horn ker ar vrud e oa gamet? Tud a netra, 'zet da doueli, 'zet da dreiz tud hag o doa bet arc'hant — pion oar? — evit touelli ar re all, tud evet d'ezo, marteze. Rouez ar veajourien a dôle evez ouz komz ar bastored, ha muio'h rouez c'houz ar re ne c'hoarzent ket o klevet ano eus ar c' Mesias s'ze hag a oa o chom en eur c'hraou war ar plouz...

Eur sionder vras a rene er gamb uhel. Brudou ker a oa evel pa ne vijent ket. Buhex pep hini a oa en em dennet en e ziabarz... A greiz holl, e tarzaz eus a-douez ar blokad tud en di-ironkadenn. Lia a oa o paouez lezan peure'hret en he c'hreiz burzud ar sklerjienn.

Neuze Henoc'h a zavas en e zav ha, gant eun fol-lagad endro d'ezan :

— E Eomp ac'han'! emezan. An den-man a zo dis-kiñtel !

Hag holl ec'h ejont, nemeto o fevar, Ambiorix, Domitillus, Lia ha Simeon.

E Kraou ar Mabi

Lia a lavaras :

— Eomp d'E vete !

N'o doa netra all da lavaret etrezo. Laouen e oant o welen en em gavent, int o fevar hag o doa an hevelep kredenn hag an hevelep kalon, dispartiet diouz ar re all.

Petra o dije grêt gwelloc'h breman eget mont da reuz d'Ezan festeni? Lia ne zonie ket ken pegeu grevus ha pegeu iskis et o d'ei, savet ha maet e doujanz al Lezenn, ober eur gammed ar seurt-se.

Simeon a c'houlenas :

— Ho preur, ha kiout a rei an dra-ze e'g gred ?

— Va breur ! emez; hezan eo evidon evel al Lezenn; n'en deus holl etet warnon ken ?

— Eo, eme Simeon; dindan e c'halloud e chomit, hag e zorn a de ren ho kammejou.

— Me 'zant pell diouz al Lezenn goz; me 'vel ma diabarz evel skubet da zigemer eul lezenn nevez. Ker-zet 'n em rök, me o' heuilho betek kraon ar Bugel. Hag o sellet ouz an tri den o vont gant ar ru, e lavaras goustadik, evel pa vije eun all o komz emi :

— Ar re-ze eo va breudeur breman !

Diskenn a reus priman n'halle ann dereziou lia mont d'he c'hambur da gomer eur ouel hir evit mont emez. Mar dije kavet he breur, he dije goulnet d'he digantan d'ont he-unan e ker, met n'her c'havas ket; tec'het e oa, hep rei d' c'houzout da helec'h. Elec'h bezan nec'het, sderaeat eo en em gavas lii, o welen e oa savet pep skoil diwar he hent hag ec'h eas, ken fonnus ha ma oa d'ereat d'ezal hale, warlerc'h Simeon hag an daou estranjour, war gree'h gant ar ru kre-c'hiennek ha striz.

Meus aon o deus daleat o c'hammejou, abalamour ma c'hallje heuilh ezetloc'h o rondou. Setu int duze, o trei war an tu dehou ha hepdale emant emez a gër. Ha kerket e chomont az-zav dirak eul lochenn harp ouz eur roc'hell. Lia a garje nijal, met he diouhar a flach dindani, gant he c'halon o lamp, a daol trum, en he c'hreiz: « Aze ! » Ar ger-ze a deu war he zood ha n'hell lavaret nemetan.

An tri den a zo di el lochenn hag e sonj er fromm, el levezon, en deneridigez a de en em veskan en o c'halon ! Her gvelet ! Hen, Mab an Holl-C'halloudek !... Ha gwir eo e c'halle daoulagad an den paran war e Veurded? Keroch ! E vete deut da vevan 'n hon zenez, dindan an diavé an disteran? Ya, red eo hon annez, n'helle ket dont nemet dindan druilh ar baourentez ! Hen eo, pegwir eo gamet hep ti, hep kavel, heb eur vaillhenn, zoken, da lakant endro d'e izili !

Hen eo' Aze en em ziskouez an Doue ! Ar pagan a vo-lontez vat en deus gwelloc'h egeh ar Judeo pennek ha lore'hus. Lia a zo straffilhet holl breman ha ne gred ket ken tostaal... E vete bet gamet hi, e koulz hag amzer, ha deut da Vethleem, da welet dez an Otron ? D'e welet e-unan ? O' frugarez ! frugarez ! Met n'eo ket din ! N'eo ket din ! Arabad d'ez mont pelloc'h ! Ha nouze, eur vaouez n'eo ken... Met eur vaouez a zo en e gichen, e Vamm ! Marteze eman gant war he barlenn... Eo ! mont a reio betek d'ezo... Hag e sonj : Da welet ez eo gwir va hunver an novez diwezan... Kammed ha kammed, hep gouzout petra ra, eo deut Lia betek seel al lochenn. Eno sevel a ra he sellou... hag e well... Kerket, he daoulagad a glou war ar we-ldigez, evel dorn eur c'halsker war eur pezh aour... Oh ! Biken ken ne de'ho diouz hec'h ene an dolenn veo a zo diraki, an Doue hegal hag e Vamm ! Eun enkre, koulskoude, a flemm he c'halon : Ah ! Ma vije het he

breur en he c'hichen ! Eur respont a deu d'ez. Bez e peoc'h ! Me reio war ze va bolontez ! N' em lezet a ra neuz da vezan beuzet en eun evristad asur, dige-mesk hag a lak da zovel en eun c'hriz, war an eur, eur feiz direc'her, ar seurt ne ve biken distrujet.

N'eus het ger etet etrezo; er c'hraou n'eus distonel mouez etet ha, koulskoude, ar bed holl a gavont c'hemet pa deut war o c'hiz, Lia, Simeon hag an daou estranjour, da c'houlou an deiz. Enno o-man e santont o larzen evel eur vammenn nevez a vuhes. 'N em anaout a reont evel tud all, evel pa en em wellent evit ar wech kentenn.

An hevelep moute'hoar en o daoulagad, war o diou-yeuz, en em zellont hag e kav d'ezo gwelent an eil war dal egile eun hevelep sin hag o gra breudeur.

Pep hini diouz e de o tizroont warz ker, nemet etre o enoer ne vo ket ken a zispart. D. N. D.

KELEIER

Goueliou ar Werc'hez e Breiz

D'ar 7, 8, 9 ha 10 a viz Gouere ez eus bet goueliou hag o deus digaset tud o Gouere evl ma n'eus ket bet gwelloc'h kement.

D'ar yaon 7, e teuas Xuyenn tri mil bugel d'en em zoda e-chazh treid I. V. Vrelez evit kana he muelid: 72 a oa eus a Loperhed hag a oa eun dudi o welet en o dilhad breizek. Pereg e tigas ar c'hiz, e meur a bar-vez, da lakat war bemou hor m'ec'hed bihan tokou dis-tranlec'h an eil eget egile?

D'ar gwener 8 edo dervez ar veleien; d'ar zadorn 9 dervez ar barrisizant; d'ar zil 10, dervez Goueliou Lezenn s'hez; 33 prosession a oa eno 30.000 den ouz o hent hag an 'Aotrou Duparc en o feun.

Da gloz lein, an A. Kerbel, maer Brelez, a lavaras d'an Aotrou 'n Eskob an nebeud ger-touman:

Aotrou 'n Eskob,

Mez un on, koulz lavaret de'ch, plus peus ou zrakere-het da veza het met c'hoec'h anbroug gant hor c'hirri pe hor marc'hou-hoarn hag a oa warno unan, da o'hann, eus a bep li, rak d'it-me eo da lavaret d'ezoc'h *trugarez em hano hag en hano kement-hi* e zo, er bar-vez da veza deut da ren ar goueliou neu-man a reomp an enor d'ar Werc'hez.

Biskoz 'n hon deuzou goueliou amañ lidaon kar an ofe-rena pa rez kemet gant an eskob; biskoz, kennebet 'n hon d'eo gwelloc'h ker skler hag hizio eo an eskob an hanter-our etre an neu ha ni.

Brelez a vije da nitroden an enor eus ar goueliou breizek hag hor bugale a lavaro d'o bugale hano an eskob mat a reus d'omp eun hevelep enor. Euz doleuz a zo hag e weler warni d'omp ar Christ hag hini sant Fransez Assis a'oz gant un hevelep tach. Me gred ho peus hizio, Aotrou 'n Eskob, stagel, amañ, gant un he-velep tach, doue Maer Brelez hag hini ar Person ha pa vezimp tremen, an A. Douel ha me, ar Maer hag ar Person amañ, a gendelcho da neu amañ, eus an eil rumm d'egile, hag an unvezese a bado da viken p'eo gwir eo bet beniget hizio gwec'h en hano Jezuz hag e amañ santel, Hroñ Vurio Vrelez.

Eurus ar parrezion hag ez eus emglev evelse etre o fennaduzou, pep tra enno a ya war well, trou ar c'horf ha trou an ene.

Goueliou Keranna

Goueliou santas Anna, e Keranna, a zo bet rennet er bloaz-man gant Aotrou Charost, kardinal Roazon, nao eskob, tri abad, hag 50.000 den ouz e heul.

Pell a zo abaoe ma n'eus ket bet gwelloc'h kement a dud e lez Rouanez Breiz.

Met perag ne glever ket muio'h e Keranna brezoeng Yvon Nicolazig hag hini Santez Anna ?

En bro ne ouezan kouz nemet e yez va bro ha gant va mamm ne ouezan kouz nemet e yez va mamm !

Sul ar Zakramant bras e Reazen

Diouz ar beure, da 7 eur hanter, ar c'hoec'h bras o eni a c'haz ar bôtred yaouank d'an ofenna kemit evit gant ar c'hardinal Charost. Na pegeu kaer eo gwelloc'h tri mil den yaouank o kommit hag o c'houlenz ouz Sant Loez Gouezig ar c'hraz da vale war e rondou. Gweldet a raer an holl skolachou gant o mistri, ar Boys-Scout, ar studierien hag all. Goude an ofenna eur shalon, a zisplig d'omp buhez sant Loez, skouer an dad yaouank hag e tiskouez d'omp penaos kerzet war e rondou evit ober hon treuz, er bed-man, evel eur gwir tant.

Diouz an noz, da 1 eur hanter, ar c'hoec'h bras a zom-adarre; an dro-man n'eo ket evit gervel ar bôtred yaouank hepen eo, met an holl, an holl e ker-benn Breiz, evit enori Jezuz en e zakramant mueler ru vezo. Ar roue a zo leun a dud ha bec'h a zo o vale; mil boan h zo o tostaal ouz an Hileveur.

Setu ar prosession o hent er neiz; na kaera tujeun da gwelloc'h. An Aotrou Kardinal eo 'zo o tuzen Meur ar Bed; an holl a stou pa dremen; eun dudi eo gwelloc'h mil-lierou tud evelo o stou dirak o Doue.

Hag an tiez, na pegeu kaer int ficher; er ru e *La Marie* e ar mogetou a zo stiget lienn gwenn ha ruz war-neo golod a herminigou; ouz ar prester banniellou gwenn ha ruz, herminiget; e ru Toulouse, al lienn a zo meten ho gwenn hag herminiget. Ar *Grand Hotel* f'ou-ents a eunan, n'en deus ket dispartet hizio e vammel tri liou. Er ru Destrain, a-bouez sellet uhel a-walc'h, bedig an trede solier, e weler tri banniell ruz, gwenn ha glas. Er ru e *de l'Herminie* e ne weler, tu ha tu, nemet herminigou. E kichen Iiz Sant Salver ez eus eun aoter da ohana ar zakramant. Goude bemou ar zakramant e tiskennomp ru Moutfort; eno sellet en tu ma keroc'h ha ken uhel ha ma keroc'h, ne welo'h nemet banniellou herminiget. Eur wech treuzet plasaer ar Chalais enaomp e ru Sant Erwan; eno treuz a zehou, e kaver eur banniell bihan tri liou, met a heul al kaer ho po sellet ne welo'h, dre ma'wec'h nemet banniellou herminiget. Ker-benn Breiz a zo d'omp eur skouer a feiz hag a garantez-veo hag a vije mat hen heuliz en holl barrez zizuz ma 'z eus Bretoned enno; sioas, n'omp ket en em gavet euz c'hoaz !

YV. AN FLOCH.



Feiz ha Breiz a zo pevar real ar pez

BREST, MOULEREZ AR SKRIDOU MAT, 4, STRAET AR C'HASTELL

Ar Merour: F. GEORGELIN.